

## Recit

Eus ar Revolution derrubl c'hoarvezet e Paris,  
Ar 26, 27, 28 ha 29 a vis Gouere 1830.

(37, suite)

Var ton : Adieu, Pontreco.

Prestit oll hoc'h attantion, Bretonet a Veiz - Izel,  
Da glêret ur recit quirion renget en un urz fidel ;  
Ennan e velot pen-da-ben pebes revolution  
Zo bet achuet qer soudan dre gouwach an Nation.

Ar bêvar varnuquent Gouere e voe casset lizerou  
Da bep Par, da bep Deputé da vont d'o assambleou ;  
Mes pequeñ horrupt decevanç ! ar c'houec'h varnuquent, ò crim !  
E voa distrujet Chart ar Franç ! e voat dija en abim.

(38)

Teir ordrenanç a voe rentet hac a ras d'an oll fremi ;  
Actou dign eus a Vinistret incapabl da c'houarni.  
« Ha se eo eta hoc'h attach erit ho Mestr, ho Roue ?  
» Na ouffac'h pari davantach ous a venjanç un Doue.»

Clêvit ar c'henta ordrenanç, ha comprenit à fêçon :  
Na alliet mui ebars en Franç publica ompinion.  
Elec'h ul liberte leal dleet da bep citoyen,  
Archerien, prison, tribunal, a voa o douça moyen.

An eil eus an ordrenançon a voa erit neanti  
D'an Electourien o droajou ha donet d'o zourmanté.  
M'ey dija an ordrenanç - mâ gallet caout he güir effet,  
Al liberte ne voa netra, hac ar Franç a voa collet.

(39)

An deirvet ordrenanç a voa rentet vit disunani  
Un assamble choaset gant joa erit boneur peb-hini.  
Ar penrou fall o doa soujet dindan ar yeau hor brêvi,  
Ha gant tenrou fusuill losget donet ousprey d'hoz trec'hi.

Ar 26 a vis Gouere.

Paris a voa tranquil meurbet, pa êru ar Monitor....

Qerqent an oll zo spouronet hac en em zell gant horror :  
Na greder get ober ur pas, na comz demeus ur mignon ;  
Glae' haret eo bian ha bras, ranna a ra o c'halon.

Protestation ar c'helaouerien.

» Aboue c'houec'h mis voa annoncet violanç al lezennou ;  
» Mes den n'en derije credet e zoat qen tost d'an termou.  
» Ar Ministret a Publie voa qementse falsentez,  
» 's-coude an oll a vele an drouc o crezqi bemdez.

(40) » Ar rën legal zo affrontet, hini an nevez a gommans ;  
» Den na dle beza soumetet da octou a violanç.  
» Herwez ar Chart, article eizvet, eo permetet da bep den  
» Da ober ma vez imprimet e oeuvrou, herve il lezen.

» Leun a fianç el lezennou, o heuillemp gant plijadur ;  
» Mes hirio, dre 'n ordrenançou, na rër nemet goabcadur.  
» Rac-se, pa deu 'r Gouarnamant da dervi e oll lezoù,  
» En em sellomp palantamant dispanset eus hor voeuzou.

Nombre bras a vanufacturioù a zo serret en Paris,  
An ouvrier dre ar rujoù na gav labour vit nep pris.  
Ar c'hommerç a zo neantet, an oll zo en disesper ;  
Partout al labour zo manqet : n'ouzer petra da ober.

Autrou Ternaux, den generus, forcet ive da cessi,  
A lavar d'e dud maleurus : « N'ellàn mui hoc'h occupi ;  
» Ezoç'h arze cant-antèr-cant dilabour, hep neb esper ;  
» Dalit eiz de a bêamant.... Grena rân var ho miser.

(41) » Gouzout a rit, va mignonet, eo suprimet Va micher ;  
» Rac se na vet get estonet mar serràn va atelier.  
» It bremâ da c'houlèn labour ous ho mestr mad, ho Roue ;  
» En eo a dle dont d'ho sicour : mèn dezir en han' Doue. »

Ar bobl en em dastum qerqent vandro ar Pales-Royal,  
Hac eno en em guzulent, hep gout petra da zonzal.....  
Ar jandarmeni a erui da zissipa ar vanden,  
Ha lachamant e creiz ar ru o sco a dolioù sabren.

Trouplou demeus ar Gard-Royal a encern ar jardinoù,

378

O voal-drêti an oll ractal, prest e serront ar grillou.  
Ar foul ac'hano en em denn, leun a spont hac a c'hlac'har,  
En eur grial var bouez e benn : d'an traon, Polignac barbar!

Ar Gardou-Royal, gant arrach, a vassacr ar vourc'hisien,  
Hac a ra un horrupl carnach eus an oll, bras ha bien,  
Ar prenestou a zo brizet, ar massacr a zo o ren,  
Ar gardou a zo lapidet; ô Doue! pebes goalen!...

Protestation an deputeet.

« Ni entrezomp, Deputeet, a brotest var an honor  
» A enep goal-oeur Ministriet, pere a ra deomp horror:  
» O ordrenançon maleürus a laqa Franç en danger;  
» Rac-se bezomp oll generus, ha salvomp hor mam-brô gueb! »

(42)

An 27 a vis Houere.

Ar bobl en foul hac hep armou en assabl hep dale,  
Hac an archerien dre ar ruyou o sabrenne adare;  
Mes souden e zeus resistanç, an dud bepret o cresqi,  
En em laqa leun a vaillanç gant armou d'o gombati.

Calz anezo a red souden varzeu pales Polignac;  
Mes emâ vit en em difen ha tec'hel ous peb attac  
A laqa en em encerni ous calz eus a ganoniou,  
Hac en eur eva ha debri a gommande ar muntrou.

Hep accord en em unanet, an haroset bourc'hisien  
Gergent zo en em amparet eus ar postou a zifen.  
O c'henta soign neuze a voe da dervri ar fanailhou,  
Ha d'en em brocuri goude sabrennou ha fustuilhou.

(43)

Ar ruyou voe buan barret a dreustou hac a guiri,  
Evit ma vije arrêtet ar jandarmet ennemi.  
Hep qemer ur moment repos, an oll en em brepar mad  
Evit souten ar c'haera caus dre an derrupla combat.

An 28 a vis Houere.

Dious ar mintin ar bobl antier a voa oll en mouvamant;  
An Ty-commun en bër amzer voa en pouvoar tud vaillant.  
Ractal an Drapeau tricolor a flot var beg an tourion;  
An tocsin a gresq an horror, terrubl voa an trubuilhou.

Ar Gardou cōs national ha soudardet ancien  
 A zirebas eno ractal evit sicour an difen.  
 Haroset Austerlitz, Jena, en em gav atau dars,  
 Hac a quie, carguet a joa: Al Liberté, he n' maro!...

(44) Oll scolaerien vaillant Paris en em joign d'ar vourc'hisien,  
 An archerien, soudardet Suiss eo o gass' adversourien;  
 Rac evit ar soudardet all, d'arust m'o devoa bet arc'hant,  
 1. <sup>1</sup>er get n'neur o zamal; na voant get hep nec'hamant.

Anfin, ar massacr a gommanç, na glêvet nemet tennou;  
 Eno e teu haroset Franç da goeza a vandennou;  
 Mes arouc receo ar maro e rent d'o adversourien  
 Scarza ive neuze d'o zro ha ruilla var ar blacen.

Dibaveet voe ar ruyou, an doennou dispennet,  
 An oll a gargas o c'hamprou, hac ar p'nestou routet,  
 Dre ma velet ebars ar ru Suisset, gardou, archerien,  
 E zoant flastret eno diouc'h-tu, n'oa mui dezo a dermen.

[ou: rentet;  
 je ne les pas bien  
 ce mot.]

Gen horrupl e voe ar c'harnach, ma veljet neuze souden  
 Ar Gardou-Royal gant arrach o tiffamma bleo o fenn;  
 « Nan, emezo, en eur yudat, n'omp get grêt d'eur seurt torfet;  
 » Lazit ac'harnomp er plas-mâ; bigen ne vemp divore'het.

(45) Unan eus o officerien da Bolignac a scrivas:  
 « Ne gontit get var va souten, re zo massacret, siouas!  
 » Ar c'harnach-mâ zo gant Doue, me en tou, disaprouvet,  
 » Ha certen biscoas hon Roue n'en deveus er permetet.»

An 29 a vis Houere.

Daou general: Gerard, Dubourg, a quemer commandamant,  
 Hac en peb ru, en peb falsbourg a gundu an dud vaillant.  
 Ur mignon benac d'ar Roue en em rent er e quever,  
 Hac er suppli, en han' Doue, da lagat fin d'ar viser.

Ganto Polignac conjuret da rei e zemission,  
 Hac ar Roue ive pedet, vit bonheur an nation,  
 Da dervi an ordrenançon, a vil maleur ar zourcen,  
 Mes ar Ministri gant bombançon a fell dezân o zouten.

O maleuruses qer Paris! cede tē eta livret

D'ar brezel civil, dre avis tud gen cruel ha tigret !  
 Ar massacre, an tan hac ar goad a veler e peb qartier,  
 Na respecter na sex, na oad ; distruja eo a ranper .

Tri devez ez eo bet padet ar c'harnach gen hornerus ;  
 Nac a vil den zo bet lazhet hed un amzer gen euzus !  
 Nac a hini o deus collet breudeur, tadou ha mamou,  
 Hac a zo bremä 'bandonet d'ar vizer ha d'ar c'hanvou !

(46)

En deizioù ze a voe gnetet graguez ha bugaligoù  
 O combati vel haroet evit souten o droajou,  
 Ma ve ret din dont da scrifa peb action generus,  
 Bigen na elfen finissa, rac oll e voent burzudus .

Martere ve cavet habeg ma chomfen hep discleria  
 An action gaer a ziou vreg e creiz ar c'harnach brasa ;  
 Diffram a rent o fusuillou digant soudardet lazhet,  
 Hac hed an deiz er gombatoù en em ganment vel goaset .

Merc'het yaouanq zo bet gnetet, o trespizout ar mindraill,  
 O cass quin da dervi sech hed o zud e creiz ar vataill .  
 Un itron a gasse bemdez he fevar mab d'ar gombat,  
 Hac a excite anezo d'ober o dever erfat .

(47)

Mes sellaoùit oll amä c'hoas un dra hac hoc'h estono ;  
 Ur paotric eus a bemzec vloas, mes n'ouzer get e hano,  
 Adreus d'an tan hac d'ar mindraill, armet eus er vistolen,  
 Var un chef cavalier e saill hac etor dezän e benn .

Diouc'h-tu an oll tennou neuze varmezän zo bet losquet,  
 Mes ar buguel, dre c'hrac Doue, var e gop zo n'em dolet .  
 E garaboussen voa coezet etouez e adversourien ;  
 Mont ra hardi d'e guemeret, hep beza trapet nep tenn .

Ur Gard national chasser, arauc monet d'ar gombat,  
 A boq d'e vreguic yaouanq qer, douguerez, herve 'n hanad .  
 « Va c'halon, emezi, a grën eridout, va quin rignon,  
 » Mes, red.... disques out citoyen, ha difen an nation .»

Ur plac'hi yaouanq a citer demeus ar brassa calon,  
 O velet varnei e tenner, e saill var un perz canon ;

(48) Conduet da Dy-Kêr neuze var ur fauteill voe placet,  
Ha curumet eus a laure d'ar quêr neuze digasset.

Seurezet eus ar Brovidanç, dindan tennou ar Suisset,  
A red da zicour, hac a banç var al lec'h an dud blesset.  
O na caera vocation, soulagi ar maleurus!  
Perz triumph d'ar religion da gaout tud gen generus!

Tri-ugent pagen a gavân leun a vercou vaillantis  
Ebars el leor a gonsultân e gloar ar bobl a Paris;  
Mes dre n'ellân oll o scrifa, me ho ped, citoyenet,  
Da quial oll gant calz a joa : Vis ar Parisianet!....

Ur general courajus bras a exposas d'ar Roue  
Penos en doa collet, sious, e reng, e autorité.  
Charles-Deg, manriet gant glac'har, a respont dezân soudan,  
En ur sellet trist d'an douar : Petra fell d'ê'h a rafen?

(49) Charles-Deg hac e oll famill, reduiset d'an desesper,  
En em drein varzu o exil, o ene leun a vizer;  
Stracal a ra o c'halonou o quittât bro gaer ar Franç;  
Adieu! mezo, leun a zaelou, n'hoñ eus mui a esperanç.

Ar Pared hac an deputet a ur vouez e general  
O devez bet ractal galvet d'hon gouarn ur prinç leal:  
Louis-Philip, duc d'Orleans, den just, fidel ha guirion  
A zo pignet var tron ar Franç, en joa bras an nation.

Neuze e teu, dirac Doue, e presanç an oll cheffou,  
Da douet var e feiz al le d'observi al lezennou,  
Da c'houarni gant lealdet, da renta justiq ato,  
Ha d'ober o boneur bepret d'an oll betec ar maro.

Cetu eta hanavezet dre Franç oll evit Roue  
Louis-Philip Genta hanvet; ra vezo dign a Zoue!  
Graç dezân da ellout rêna vit boneur ar Francisien,  
Ha graç ive d'ellout beza guir dad da bep citoyen.

(50) Bremâ, Francisien, vel breudeur, adressomp hon oll voeuyou  
Da Zoue, autor hor boneur, vit obten e faveuriou.  
En em unissomp a galon, bezomp mignonet ato,

382

M'hor bo e venediction bete 2y heur eus hor maro .

Fin .

(30 Eaut 1830).

(Vol. IV, p. 37-50.)  
48 str. numérotées.